

EN RIBL AR STER

Ponner e oa ma zreid, ha ma c'heïn daoubleged ;
Ar c'houezen a ruilhe war ma zal poultrennet,
Ha skuiz e oan o vont ma-unan dre an hent,
Goloet ha meinek dre belec'h e kerzen.

Goude bean kerzet pell braz ha gand anken,
Dam-dost d'ar c'huz-heol, 'n em geviz 'n eun draouien
Loun a freskadurez lec'h e ruilhe eur ster,
Gorrek ha dudiuz, a-dreuz d'ar prajeier.

'Vit diskuiza eun tamm e riz eun azeik
En ribl ar ster, 'n eul lec'h gwasked. Eul labouzik
A gane ust d'am fenn e ganaouen lirzin,
'N eur veska e vouezik gant trouzik eur vilin.

Den ebet war an hent, den ebet er parko,
'Vel pa vije dre-holl tremenet ar maro.
Er pello, koulskoude, 'kleved c'hoaz o vlejal
Ar zaout, ha chas tagnouz war o lerc'h o c'harzal.

A-benn eur pennadik, eun den a dremenaz,
Touet a re Doue 'vel eun diloster chas ;
Skrijal a re eneb d'an Nenv ha d'an douar,
Ha skei 're didrue ar marc'h oa ouz e garr.

'N eur welet an dra-ze, glac'haret ma c'halon,
E zonziz kement-ma : Ar ster 'c'h a d'ar mor don,
Al labouzik a gan meulodi da Zoue
'Kichen an nez an euz kuzet e-mesk ar gwe ;

An heol, 'pad an de, a sklerijenn ar bed,
Ha pa 'c'h arri an noz, al loar hag ar stered
A deu da lugerni en bolz c'hlaz an Nenvo,
Ken skeduz ha ken splann evel eledigo.

An holl dreo krouet, 'n eur gir, 'ra an dever
Zo bet gourc'hemened d'eze gant o C'hrouer.
An den hepken, an den, eur c'hrouadur dispar
Dibabet gant Doue evit ren an douar,

'Deu da zevel e vouez eneb an Doue-ze,
Ha da lakat e nerz, e spered, e vue,
D'ober brezel d'Ean en eur stumm ken euzuz
Ken a denn war ar bed ar gwalleurio spontuz.

Doue, Renner peb tra, pa 'z oc'h holl-c'halloudek,
Gret ma vezo an den 'n ho servij kalonek,
Reit nerz d'e volante, d'e speret sklerijenn,
Evit ma c'h ei d'an Nenv d'ho meuli da viken.

29 a viz mae 1898.

An Tremener.
M^r Lec'hvien, prof. a Giequier
mort oct. 99 (cf. Roaz. n^o 90)